



2018

## **Kazetenniñ : Ur sizhunvezh evit ober anaoudegezh gant bed ar radio**

Labourat a raimp a-hed ar sizhun evit ober anaoudegezh gant bed ar radio ha sevel abadennoù.

Pleustrek vo ar staj penn-da-benn.

Ret eo d'an dud a lako o anv bezañ en o aez gant an urzhiataerioù.

Mont a raio ar skipailh war an dachenn evit atersiñ tud.

1 devezh labour er radio a vo d'ar Gwener (gweladenniñ Radio Kerne + Labourat en studioioù)

An danvez fardet gant ar stajidi a vo skignet da heul ar staj.

Preparet vo ur rentañ-kont dre ar son diwar-benn ar staj evit skignañ anezhañ d'ar Gwener da noz e KEAV.

### **- Kaout un tañva eus teknikoù ar radio:**

Komz ouzh ar mikro, prientiñ ha kas un atersadenn da benn, skeudenniñ ur reportaj gant ar son, sevel kronikoù, sevel blenier un abadenn...(neudenn an abadennoù)

### **- Ober anaoudegezh gant ar binviji teknik : sonenroller, mezialtoù frammañ...**

Ma 'z eus kinnigoù kelskrid gant lod (tud eus o familh pe traoù all) gwell a-se.

**Ne vo ket kemeret ouzhpenn 10 den er rummad-se. Gwelloc'h eo d'ar stajidi bezañ en o aez gant an urzhiataerioù.**

	Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou er radio	Gwener er radio
Mintin	<p>Kinnig ar radio, an teknikoù, program ar sizhun</p> <p>Strolladoù labour</p> <p>Dibab atersadennoù, sujedoù kronikoù, kemer emgavioù</p>	War an dachenn	War an dachenn	War an dachenn	Frammañ pennadoù-komz hag abadennoù + abadenn rentañ-kont fin ar staj
Goude Merenn	<p>Teknik enrollañ</p> <p>Ober atersadennoù</p> <p>Teknik meziant frammañ</p>	<p>Frammañ ar pennadoù-komz</p> <p>Poelladenn : Sevel ur blenier</p>	<p>Frammañ ar pennadoù-komz</p> <p>Skrivañ kronikoù</p>	<p>Gweladenn ar radio</p> <p>Frammañ pennadoù- komz hag abadennoù</p>	Frammañ pennadoù-komz hag abadennoù + abadenn rentañ-kont fin ar staj

**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.